

AR MARVAILHOU


SON MADALEN ⁽¹⁾

Métro. $\text{♩} = 88$ environ.


Kanet gant LAOU NICOLAS, mevel e Skaër. —
Even 1910. H. G.



Bis-koaz ne ve - liz ke-ment all, E - vel ma



gue - let en deiz all, O ra - bi - tou, tran - la -



le - nik, O ra - bi - tou, tran - la - la.

2
Me meuz gueleet eur vanden saout.
Eur parkad kellienn tont d'o c'haout.

3
Ha me meuz gueleet ar gerc'heid
E kornig ar vur ajeit

4
E kornig ar vur ajeit
Eur goukouig e kano d'hei

5
Ker braoig all e kane
Ma chas ar c'hartel a zanse.

6
Eur bleiz koz oa o prena per,
Hag eul louarn o verza ier.

7
Eur gazeg koz o lae'ha laou
Deut da velet ma laron gaou.

8
Setu aze zon Madalen
Ne gredan ket a oar oc'h penn.

9
Mes eur mignon en deus kavet
Ar rabbitou zo bet hentet.

10
Diouz Kerneptu da Noninou
E padfe sonig rabbitou.

11
Rag digouet e toul hent an Ank
Da Vadalen ni rei eur blank.

12
Rag pa vank ar butun malet
Teod Madalen a vez sornet.

13
Me meuz guell't eur pokerig-kraon
Huerzo rusk da Glaud Meil Kerdraon

14
Ar moc'h bin (2) am euz guell't ive
Preg galleg an eil d'egile.

15
Laret a ren kerkoulz ha c'hui :
« As-tu trouvé ? — Oh oui ! oh oui !! »

16
Oc'h penn-ze gueleet am euz c'hoaz
Eun eubeul bin o koubo toaz.

17
Eur c'huez koz o tamouza bleud
Hag eur c'haorig o tibun neud.

18
Eur mel logoden gand eur vaz
O lopa var gouzoug eur c'has.

19
Eur iar goz diouz va fennkear
Frita uiou brein d'ar c'hemener.

20
Eur gaëz koz e barz ar marc'had
Huerzo krogennou marc'had mad.

21
Tabut ouz bosser ar Fauët
Rog distol var eul lur loged.

22
Eur glesker am euz guell't he ienn
Hueo eun tousek gand eur blouzen.

23
Eun azen oc'h ober tro kear,
Gand Rikou an tabouliner.

24
Hag e Skaër o kinnig spilhou
Ha tachou kezeg d'ar foariou.

25
Gueleet am euz c'hoaz eur gaouen
Skoto he c'houden 'barz eur greuzen :

26
Razo he varo d'eur penn-kaz
Ha kribat he benn d'ar spaë-glaz.

27
Eun deontezig o neo gloan
Evid ficha he maoutik glan.

28
Ober d'ezhan eur c'horkennig
Vit mont da bard'n Lichibronig.

29
Breman deut gand ho kuenegig
Binaat (3) ra 'n traou 'barz ar voestig.

30
'Vit kouezo bennoz Dou' varnoc'h
Eur chapeled larin 'vidoc'h.

31
Enn heonv ni velo Madalen
Eur gurunen enn-dro d'he fenn.

32
Eno, hed ann eternite,
Kano rei d'an Otrou Doue.

(1) Ann otrou Per Martin, en eul leor moulet diarbenn Skaër, a lavar edo Madalen (paourez a barrez Guiseric), eun Demezel De S'Jalmès. He zud koz a oa en em dennet e Breiz-Izel d'ar mare ma walgase Cromwell ar gatoliked e Bro-Zaoz (1648-1658).

(2) bin = bihan. (3) Binaat = Bihanqaat.